

# Soudard Breiz-Izel

204

*D'an aotrou Vallée.*

Enor ha meuleudi da zoudard Breiz-Izel,  
Kalounek ha dispount e-kreiz tan ar brezel  
War dachen an emgann eo atao ar gwella,  
Morse n'e welot o kila !

460

DISKAN :

E neb lec'h ne gavot e bar !  
An nenv a gouesfe d'an douar  
Ha ne c'hellfe ket e ziskar.

Eun oan n'eo ket dousoch 'vit eur zoudard a Vreiz,  
Met, pa 'z a en egar, e teu da veza bleiz ;  
Malloz neuze d'an neb a gouez 'tre e zaouarn !  
Skei a ra 'vel eun horz houarn.

War zouar 'vel war vor eo brudet e pep bro ;  
Biskoaz n'en deus desket krena rôg ar maro,  
Dirag e enebour ne bleg morse e benn,  
Ploum e chom 'vel eur ganaben.

Er stourmajou brasa eo start evel eur roc'h,  
Kaer a zo e dourta ne c'heller ket e loc'h ;  
Ar « Voched » dirazan buhan 'red da guzet  
Dindan an douar 'vel gozed.

En Izer, e Verdun hag e meur a lec'h all  
En deus-douget uhel banniel santel Bro-C'hall ;  
An holl 'velas neuze ne oa ket c'hoaz trôet  
Ar gwad a red en e wazied.

Penaos ne ve ket gwad ha kaloun en e greiz,  
Savet 'vel ma 'z eo bet en eur vro evel Breiz ?  
E lec'h ma 'z eus mor rust, gwez dero ha kerreg,  
Ez eus ivez pacted barrek.

Skoit, soudarded Breiz, pa 'z eo kalet ho prec'h,  
Stourmit 'vit ho mamm-vro ken na vo d'eoc'h an trec'h !  
Warnoc'h gant levezeg daoulagad ho tud koz  
A bar eus lein ar Baradoz.

Pa stourm Doue ganeoc'h ar gounid a vo d'eoc'h ;  
Dizale e tarzo deiz benniget ar peoc'h !  
Ni ho kwelo distro gant ho tal kleizennet  
Hag hoc'h asgre (1) medalennet.

Bro-C'hall 'vo anaoudek eun deiz en ho kenver,  
Lavaret a raio ho peus graet ho tever ;  
E lizerennou aour, e pleg he banniel,  
Ni 'lenno neuze : BREIZ-IZEL !

BLEIZ-NEVET.

(1) Peultrin.